

— 3 —

El leaz-tro 've ar c'haouled,
'L leaz-ribod n' euz 'met gwiped.

Kalz a diferans a zo
Etre al louarn hag ar gô.

Az gô a doull an douar,
Al louarn a dag ar yar.

AR YAR VELEN

En Kergrist-Moelou, en kreiz ker,
Digedoudei larideno,
E zo gwe fô hag a zo kaer.
Digedoudei tanlalarida,
Digedoudei larideno.

E zo gwe fô hag i uhel,
Hag a ve gwelet euz a-bell.

Janik Mari 'zo glac'haret ;
He yar velen he deuz kollet.

Nijet ar yar da veg ar wenn,
Ha na oar penoz he disken.

Janik Mari, na ouelet ket,
Ho yar velen n'e ket kollet.

Tolet bruzun bara d'ezi,
Ha galvet-hi : piti ! piti !

(Roet ha kanet da *Groaz ar Vretoned*
hant an Otro Guillou, person Plourac'h).
